

4  
GENOVEFA HA BENONI,

PEDIT DOUE EVIDOMP-NI



Ma ellimp oll mont eun devez,  
D'ho cavet etouez an Æles.





# BUEZ

## SANTEZ GENOVEFA

### A VRABANT.

*Var an ton ordinal.*

**M** ho suppli, compagnunez,  
Da glêvet cana eur vuez,  
Da Genovefa e zeo grêt,  
Melezour d'an itronezet.

---

A Vrabant e voa guinidic,  
A lignez nobl ha pinvidic;  
Christenez mad e voa ive,  
Güir zervicherez da Zoue.

---

Pa voa en e bûgaleach,  
Hi a garrie an hermitach;  
En eur c'horn a jardin e zad,  
Nemet eno n'em gav ervad.

---

He mam, ouz e c'honsideri,  
Eun deiz a c'boulennas outi:  
Penos, va merc'hic hermites,  
Ha ne deuet-hu qet d'ar pales?

---

Va mam , e cornic ho jardin  
Me a meus eur boqet divin :  
M'em eus eno eur melezour ,  
An Autrou Sant Yan-Badezour.

---

Allas ! va merc'hic , emezi ,  
C'houi n'en doc'h qet evit souffri :  
Ebars en dezert e zeus poan  
Ne andurfec'h qet , a gredàn.

---

Caeroc'h eguet fourdilizen  
E voa'r plac'h-mâ , a dra certain ,  
Qen a deuet da vit e foltret  
Da gass d'an noblanç da velet.

---

Eur palatin , Siffroi hanvet ,  
He renomme en deus clêvet ,  
Hac a zisqennas en Brabant  
Gant un equipach excelant.

---

Ractal vel ma voa êruet ,  
E ty e zad en em rentet ,  
En em bresantas er pales ,  
Saludi'r Prinç hac ar Brinces.

---

Goude o beza saludet ,  
E mennad en deus goulennet ,

M'en dije ar Brinces yaouanq  
Qent eguet monet a Vrabant.

---

He zad dont da gonsideri  
E voa avantajus ar barti,  
A roas carg d'e mam neuze  
Da c'hout hac hi a zemeje.

---

Va merc'h, prest en em brepare,  
Eru zo ur Prinç d'ho qüelet;  
Eur Palatin a voad huel,  
Qender-gompez d'an Impalaer.

---

Me ne meus nemet seitec vloas,  
Ha dre-ze oun re yaouanq c'hoas,  
Ne doun c'hoas nemet eur buguel  
Da vont e suit an Impalaer.

---

Evel an eol pe ar c'hristal,  
Ec'h antreas ebars er zal;  
Ar Palatin zo estonet  
O consideri e guenet.

---

Gant enor a perseveranç  
Ec'h eure dezàn ar reveranç:  
He furnez hac e modesti  
A voe meurbet d'he fantasi.

---

Mes pa voe parlantet dezi ,  
Var ar sujet d'e demezi ,  
E chenchas a liou he bisach :  
Ar Palatin en remercas.

—  
Ne ouffe den consireri  
Peguement a velanconi  
A gonserve ar Palatin ,  
Gant aoun caont refus diouti.

—  
Eur mis anter e zeo padet  
Solemniteou an eured ,  
Ar zonnerien , ar bal , an danç ,  
Vizitou bemdez gant noblanç.

—  
Siffroi, c'houi oc'h eus eureujet  
Ar gaëra demeus ar merc'het ,  
Evit monet ganec'h d'ho ty :  
Dioüallit n'e dese anui.

—  
Birviqen anui ne devo ,  
Evit qeit a ma vezin beo ;  
Ne qet evit cavet anui  
He goulennàn da zont d'am zy.

—  
Siffroi o veza preparet  
Da vont da Treves gant e bried ,

A voe gant e dad recevet  
Gant calz a joa hac a respet.

---

Daou vloavez anter e zint bet  
Hep bea gant netra tourmantet ;  
Bras e voa ar fidelite  
A voa etre'n daou bried-se.

---

Qen a deuas Abderame,  
Eun adversour bras d'ar Roue,  
Da brometi a dra certen  
Massacri an oll gristenien

---

Biscoas distruch a zoudardet  
Evit eur vech na voe güelet :  
A dal Sodom ha Bethsabe  
Bete Tour epad e arme.

---

Tri-uguent mil a zoudardet,  
Ha daouzec mil a zragoned,  
A voa gant Martel dirac Tour,  
Ha c'hoas e c'houlenne siconr.

---

Scrifa a eure d'an noblanç  
A Alamagn, a Spagn, a Franç,  
Dont d'asista Charles Martel,  
A voa General er Brezel.

---

Siffroi unan ar re vrassa,  
A varche ive da guenta,  
Hac e voe dezàn discrifet  
Manet gant an Alamagnet.

---

Siffroi al lizer pa velas,  
Genovefa a gonfias,  
E dieguez, e oll vadou  
De gonfidant hanvet Golo.

---

Neuze, pa voe prest e arme,  
E partias en han' Doue,  
Hac e voe gant Martel recevet  
Gant calz a joa hac a respet.

---

A drugarez an Eternel  
E deut ar victor gant Martel;  
Abderame zo bet lazet  
En Tour, hac e oll zoudardet.

---

Pa voe achu ar gombat-mâ,  
Da velet e Genovefa  
En deveus digasset Siffroi  
E zijentil hanvet Lanfroi.

---

Itron, cetu amâ qêlou,  
Lizeriou digant an Antrou;



Er paqat e zeus eur presant  
A dall eur somm bras a arc'hant.

---

Lavarat a ra d'an Itron  
E za'n Autrou da Avignon  
Ha da Narbon, vit qemeret  
Roue bras ar Sarazinet.

---

Evel ma clêvas qementse  
E zê c'hoas e goas d'an arme,  
E scrifas buan dre Lanfroi,  
Eul lizer goal drist da Siffroi.

---

C'houi, Siffroi a zo en arme,  
En danger bras eus ho pue;  
Mes ho Genovefa a zo  
En qer bras danger gant Golo.

---

Penevert ne meus qet a c'hoant  
Prononci comzou insolant,  
Me lavarfe ar proposiou  
A glêo an Itron gant Golo.

---

Golo a voa eun Intandant  
A voa bemde comunamant  
En compagnunez an Itron,  
En despet d'he ompinion.

---

Tol eves, papillon bian,  
Rac na vez losqet gant an tân,  
An tân eus an impurete,  
A zo ez calon nôz ha de.

---

Ma sònchfes en devotion  
Hac en modesti an Itron,  
Ne laqafes qet da speret  
Da garout nep na garo qet.

---

Pa vel ervat ar mechant-màn  
N'el qet deceo ar brinces-màn,  
Ar soupçon en deveus sònjet  
Laqat en calon e fried.

---

Amâ eo güelet an impi  
O commanç c'hoari e drajedi :  
Embêr e velfot, christenien,  
E oll draitourach pen-da-ben.

---

Eur c'heguiner a voa en ty  
A bell a voa o servichi ;  
A voa caret gant an Itron,  
Abalamour m'oa den güirion.

---

Rêi a eure an Intendant  
D'ar c'heguiner commandamant

Mont d'e c'hampr, pa vije cousqet,  
Hac e laqat o c'hemeret.

Caër o d'oa'n daou innoçant-se  
Qemer an douar hac an êe  
Da zonet eno da destou  
Eus a dreitourezou Golo.

Allas ! allas ! ouz ar gibet  
Mervel, paour qèz, a vezo ret ;  
Ni a rai pinijen hon daou  
Eus a dreitourezou Golo.

Qemeret voe ar c'heguiner.  
Hac én laqeat prisonnier,  
Genovefa a voe laqet  
Ebars en eur gambr alc'huez  
Eno e combate oute,  
Abalamour d'ar chastete.

Scrifra ra Golo lizerou,  
Ha cass messajer d'an Autrou,  
Da lavaret voa recevet  
Gant ar c'heguiner e bried.

Scrifra a eure an Autrou  
Da laqat Drogan d'ar maro,



Laqat Genovefa ive  
Er prison, qent ma êruje.

---

Pa voe bet pemp mis'er prison,  
Neuze vouilloudas an Itron ;  
Hep sicour, na goulou, na tân,  
Hi a c'hanas e mab bian.

---

Incontigant ma voe ganet,  
E gristeni e deveus grêt,  
Gant aon na varvje diganti,  
Hac en he hanvas BENONI.

---

Sevel eure Golo ar brud,  
Communamant etouez an dud  
Penos Siffroi a voa beuzet  
O sònjâl cavet e bried.

---

Cass a eure e vagueres  
Da c'houlen digant ar Brinces  
Ma carje dont de eureuji,  
E roje liberte dezi.

---

Ar Zantez a voa qelennet  
Gant ar Rouanez eus ar bed :  
Ebars er gampr pa antreas,  
Eur façad dezàn a roas.

---

Ennes eo-ta al lealdet .  
A poa da Siffroi prometet.

---

Ma vijes fidel, emezi,  
Pa voas iaqet da vestr em zi,  
Te a vije recompanset  
Pa vije êru va fried.

---

Eruout a ra lizeriou  
E tistro d'ar guêr an Autrou :  
Pa glêo Golo e teu ar C'homt,  
E za da Strاسبoug d'e rancontr.

---

Mont a ra da dy eur sorcerez,  
Hac a voa c'hoar d'e vaguerez,  
Ha rêi dezi aour hac arc'hant  
Qement ha ma vije contant.

---

M'em eus eur melezour ardant,  
Eme ar sorcerez mechant,  
Hac a raï da Siffroi güelet  
Ar pez n'en deo qet c'hoarvezet.

---

Pa voe sur demeus e affer,  
E yas joaüs ebars en kær ;  
Ma voe gant ar C'homt recevet  
Gant calz a joa hac a respet.

---

Neuze en tennas a gostez  
Da c'hout outàn ar virionez  
Var ar sujet eus e bried,  
A rent e galou contristet.

---

Golo a lavaras dezàn :  
Ne douetit qet, emezàn :  
Demeus e infidelite,  
A zo prejudiç d'ho pue.

---

Ouspen, eme an den mechant,  
Me anavez eur vreg vaillant,  
A zisqüezo en ho presanç  
Qement zo grêt en hoc'h absanç.

---

Siffroi neuze ouz e glêvet,  
A zo contantet e speret,  
Evel darn eus ar gristenien  
O tont da gredi sorcerien,

---

Monet a rejont assambles  
O daou da dy ar sorcerez,  
En eun toul dindan an douar,  
Elec'h ne voa nac eol na loar.

---

Ar sorcerez a allumas  
Diou c'houlaouen gaër a goar glas,

Leiz eur bezel demeus a zour,  
Laqat ennàn eur melezour,  
E ra dezàn teir güech guelet  
Ar c'heguiner gant e bried.

---

Neuze ec'h ordren da Golo  
Da vont d'e laqat d'ar maro,  
Hi hac e mabic Benoni;  
Ro dê ar maro a guiri.

---

Golo sur demeus e affer,  
A zistroas joaüs d'ar guêr,  
A lavaras d'e vagueres :  
Grêt ar vech-mâ eus ar Brincez.

---

Roet e setañ gant e fried,  
Evit ma vije distrujet :  
Hi hac he mabic Benoni  
A varvo sur em fantazi.

---

Eur plac'h yaouanq a voa en ty,  
Eur verc'h dezi o servichi,  
Touchet eus a gompasion,  
A yas da gavet an Itron.

---

Allas ! emezi, va mestrez,  
Grêt ar vech-mâ eus ho puez !

Deut ê ar setanç gant Golo  
Evit ho laçat d'ar maro.

---

Lavarit din , va mignonez ,  
Petra vo grêt d'am buguel qèz !  
Allas ! va mestrez , emezi ,  
Mervel a rai , qercoulz ha c'houi.

---

Va mignonez , mar am c'heret.  
Grit eur blijadur em reçet :  
Digassit din liou ha paper ,  
Evit ma scrifin eul lizer.

---

Evit ma scrifin eur billet  
Da laret adieu d'am pried ;  
Pa vezo Golo o coannia,  
C'houi ello donet davintâ ,  
Hac e deuler em c'habinet :  
Eur c'houlz benac e vo cavet.

---

Adieu , emezi , va fried ,  
Me ya d'ar maro en ho reçet :  
Biscoas ne meus gret resistanç  
Da souffri d'hoc'h oboissanç.

---

Rêi a eure an Intendant  
Da zaou vevel commandamant



En eur c'hoad monet d'o laza ,  
Ha da zigas o zêod dezâ.  
Sevel a eure qent an de ,  
Ha cassa gantàn an daou den-ze.

Pa voent êruet er prison ,  
E voe divisqet an-Itron ,  
E rojot dezi var e zro  
Eur gos vantellic d'e golo.

Pa voant êru ebars er plaç ,  
Unan a den e gontel noas  
Evit laza e Benoni  
Voa etre e divrec'h ganti.

Ne doa lavaret guer ebet ;  
Neuze e commanças prez eg ;  
E za d'an daoulin diraze  
D'o supplia, en han' Doue ,  
He laza qent eguet e buguel ,  
Ne renqje qet diou vech mervel.

An daou zervicher gant truez  
A lêzas gante o buez ;  
Ha goude o zrugarecât ,  
Ec'h antreas don en eur c'hoad.

En eur rivier, pa dremenas,  
Diamant Siffroi a daulas  
Da reded gant an dour coulant,  
Pa voa caus demeus e zourmant.

—  
Evit, emezi, n'am bo qet  
En hep feçon poan o velet  
Ar merc-se eus hon union  
Epad hor separation.

—  
An diou nôs qenta a so bet  
Dindan eun derven o cousqet,  
Hep souffri na poan nac anui,  
Nemet damant d'e Benoni.

—  
Eun druez a voa e c'hlêvet,  
Pa en em gavas dilêzet.  
Allas ! emezi, va buguel,  
Er vech-mâ e ranqi mervel.

—  
Güerc'hez Vari, petra a rin !  
Ne zeus mui a lèz em peultrin ?  
Ne denn gantàn nemet ar goad !  
Ne gav mui ur strill a lèz mad !

—  
O va Doue oll-buissant !  
Ho pet soign eus an innoçant ;

Roit dezàn ar mân da zêbri,  
Vel ma roit d'ar malvrini.

---

Neuze e tisqen ar Verc'hez  
Er c'hoad da gavet ar Zantez,  
Da zigass dezi eun heizez,  
A voe d'ar buguel maguerez.

---

Qemerit ho mabic christen,  
Ha deut da guichen ar feunteun;  
Cetu aze dêc'h eun heizez  
A vo d'ho puguel maguerez.

---

Ar bleizi, al loened mechant  
A voe dezi oboissant :  
Bembdez e teuent d'e enori,  
Ha da renta bizit dezi.

---

Er c'hoad e voa eur porc'hel güez  
A deue d'e güelet bemdez,  
Da durial an douar dezi,  
Da gavet qeler da zêbri.

---

Pa voe an daou vloas tremenet;  
Eun Æl a zo deut d'e güelet,  
Hac a ro dei eur groas arc'hant,  
Hac eur grucifi olifant,

---

Courach, va merc'h, na scuizit get  
Eun deiz e viot delivret :  
Preparent eo ar gurunen  
A yêlo eun deiz var ho penn.

---

Pa voe ar pemp bloas tremenet,  
Da oüela eo en em laqet ;  
Var e daoulin dirac ar groas,  
Evelen outi e comzas :

---

Penos, emezi, va Doue !  
Hac er c'his-màn e chomin-me !  
Ha ne dê get avoalc'h pemp bloas  
Da veza bet er poanniou bras ?

---

P'am be tânet hoc'h ilisou,  
Ha ranverset hoc'h auteriou,  
Em bije ho coler appezet  
Gant an daëlou a meus scuillet.

---

Petra, va Doue, a meus grêt  
Da veza crenn abandonet ?  
Dija e meus ancounac'hêt  
An usach am boa da brezec ;  
Mes muia tra a gresq va foan,  
E zeo va buguelic bian.

---

Ar grucifi, die viracl bras,  
Evelen outi a gomzas;  
Ha me va merc'h, petra meus grêt  
Da veza ouş eur groas staguet?

Güir eo ho mab a gresq ho poan;  
Va hini n'en dê qet bian,  
Güelet va Mam, Yan, Madalen,  
Rannet o c'halon em c'hichen.

Cetu ar Zantez consolet  
Gant ar voez a Zalver ar bed;  
Ne c'houlen mui nemet poaniou,  
Hac ar c'hruella tourmantchou.

Pa voa eun devez an Autrou  
O sellet eus e baperou,  
Ec'h êruas gant ar billet  
E devoa scrifet e bried.

Ne ouffe den consideri  
E c'hlac'har e velanconi  
Tost e voe d'e galon ranna,  
Pa lennas an tam paper-mâ.

Siffroi n'en deus mui<sup>g</sup>a repos;  
Na ell cousqet na deiz na nôs,

Gant eur voez a lavar dezâ<sup>3</sup>:  
Te zo eun den ar c'hruella<sup>1</sup>;  
Te c'heus lazet da vab ena,  
Ha Drogan ha Genovefa.

---

En em laqat a ra express  
Da vont d'ar chasse eun devez;  
Ha ma rancontras eun heizez  
En rentas en coad ar Gomtez.

---

Er c'havarn eo en em dec'het,  
Adrén qein ar Zantez cuzet;  
Siffoi a voe estonet bras,  
Form eur femelen pa velas.

---

Pa velas form eur femelen,  
Hac eun eizez en e c'hichen,  
Eur voez a lavaras dezàn :  
Siffoi, Genovefa houmàn.

---

Perac oc'h aze er guis-se,  
Er form-ze gant al loened goue?  
Me zo eur vreg eus a Vrabant,  
A zo seiz vloas zo en tourmant;  
A zo seiz vloas zo retiret,  
Gant aon rac coler va fried.

---

Greg a Vraban, din leveret,  
Ac'hanoc'h-hu pe hano a ret ?  
Genovefa e voan hanvet,  
Eur Palatin voa va fried.

---

Cri vije'r galon na vouelje,  
Tost d'ar c'havarn nep a vije  
Güelet ar Prinç hac ar Brinces  
Ha semplet o daou assambles.

---

Ha pa voant o daou disemplet,  
Ar Prinç goulen eus e bried :  
Pelec'h e m'ân ar c'hrouadur  
En deus eun tad qen dinatur ?

---

Siffroi, beo ê, dre c'hraç Doue :  
Cetu e vagueraz aze...  
Incontinent pa zistroas,  
En e c'hichen en er c'havas,  
Hac eun dornad qeler gantâ  
Da rêi d'e vam evit leina.

---

Ordren a ra d'e vevellou  
Mont d'ar guêr da vit habijou,  
Hac eur c'haros eqipet mat,  
Evit donet prest d'ho c'herc'haf.

---

Bevet o deveus assambles  
Ur bloa gant calz a zantelez.  
Genovefa a zecedas,  
Ar prinç hac e vab a chommas.

Ma ejont o daou assambles  
Da dremen ar rest o buez  
Er plaç ma voe Genovefa,  
D'ober pinijen ar vrassa.

Genovefa, ni ho suppli  
Da gavet sònj ac'hanomp-ni;  
Trois divarnomp an teir goalen :  
Brezel, qernez, hac ar vocen.

*Amen.*



---

E MONTROULEZ,  
E ty LÉDAN, ru ar Pave.